



Programm-skouer « Kontadennoù ha Natur »

Ar programm-mañ zo kinniget deoc'h evel skouer. Ne faota ket heuliañ anezhañ ger evit ger : asambles gant an animatour en-karg deus ho strollad e c'hellfet azasaat, resisaat, hiraat, berraat an traoù, hervez ar vugale ha hervez ho raktres, pe c'hoazh meskañ an tem-mañ gant obererezhioù a denn deus un tem all.

Lun	Meurzh	Merc'her	Yaou	Gwener
<i>Erruout</i> Gwelladeniñ ar greizenn Dizoleiñ ar c'haier kontoù	E Koad ar Markiz : Ar c'hoad... dre ar 5 skiant Pourmenadenn gant kontadennoù	Kregiñ da ijinañ ha krouiñ ur gontadenn a-stroll	E Koad an Noz : Kastell Koad-an-Noz Krouiñ lochoù evit ar gorriganed gant traoù naturel	Rankañ ar c'hambreier Pleustradeg
Merenn	Pik-nik	Merenn	Pik-nik	Merenn
Tro dro d'ar greizenn : dizoloiñ ar bourk, ar mouronnier hag istorioù ar vro War roudoù ar gorriganed er c'harzhaoueg	Stalioù-labour war an ijin Studiañ struktur ar c'hontadennoù Sevel dre strolladoù ur skoed ardamez	Kenderc'hel da skrivañ ur gontadenn C'hoarioù paotrsaout (sevel c'hoarielloù eunan en natur)	Echuiñ skrivañ ar gontadenn Leurenniñ ar gontadenn krouet asambles	Abadenn « c'hoariva » gant ar c'hontadennoù savet. C'hoari bilañs
Adverenn	Adverenn	Adverenn	Adverenn	Adverenn
<i>Amzer vak</i>	<i>Amzer vak</i>	<i>Amzer vak</i>	<i>Amzer vak</i>	<i>Loc'hañ</i>
Koan	Koan	Koan	Koan	
Beilhadeg kontadennoù	Beilhadeg vak	Baleadenn da serr-noz	Beilhadeg vak	

En ur bourmen dre ar c'hoadoù ha dizoloiñ marvailhoù ha mojennoù ne anvezont ket e lako ar skolidi o faltazi da labourat... Peadra da voueta ur gontadenn skrivet gante a-stroll. E penn-kentañ ar chomadenn e vo roet da bep bugel ur « c'haier kontadennoù » da gemer harp warnañ a-hed ar sizhunvezh.

